

## Enskrivañ

Evit piv : kement den c'hoant gantañ mont war miche-rioù ar c'heleñn divyezhek : skolaer, AESH, AVS, ATSEM, kasour, penngasour...

Gant DIWAN pe ur skol divyezhek all.

### Barregezhioù rekis :

Bezañ bet er sesion 6 miz gant Keleñn pe ne vern peseurt aozadur all (reiñ un testeni a-benn neuze).

**Enskrivadur:** a-raok dibenn miz C'hwevrer, **betek ma chomo plas.**

**Priz :** 3250 euro. Meur a seurt skoazelloù a c'hall bezañ diouzh ma vez kont gant ar stajiad. \*\*. Sellit ouzh ar roll prizioù war lec'hienn Keleñn.

**Darempreduster :** m'ho peus diaester pe ziaester, deuit e darempred ganomp.



## Doareoù enskrivañ

1- Lizher displegañ ho raktres micher da vezañ kaset da gKeleñn, ho CV e brezhoneg da-heul.

2- Emgav e gwir pe dre vizio gant ar bodad kadarnaat an enskrivadurioù.

## Disoc'hoù

**100 % eus hor stajidi zo laouen-tre.**

Da-heul ar stummadur « deskiñ brezhoneg... » he deus bet Sonia ur post divyezhek publik ha laouen eo hiziv an deiz o labourat war-dro ur c'hlasad CP-CE1-CE2.

Armelle, diouzh he zu, a labour en ur vagouri ma c'hall lakaat ar pezh he deus desket da dalvezout evit reiñ da glevet un tamm brezhoneg d'ar re vihanik.

Monika, genidik eus bro Asturias ha chomet e karantez ouzh Breizh hag he sevenadur, zo o keleñn ar skiantoù en ur skolaj .

**11 % eus hor stajidi o deus tapet al live C1,  
67 % al live B2 gant an DBY e 2023.**



Titouroù :

### KELENN

3 straed Vañde / 3 rue de la Vendée  
29000 KEMPER  
02 98 95 55 99 - [keleñn@keleñn.bzh](mailto:keleñn@keleñn.bzh)  
[www.keleñn.bzh](http://www.keleñn.bzh)

\* sellet ouzh al lec'hienn.

Gant skoazell :



## Stummadur brezhoneg 3 miz donaat

Stummadur dibar  
« deskiñ brezhoneg  
evit  
micherioù ar c'heleñn  
er skolioù divyezhek »



Formation spécifique  
« apprendre le breton  
pour les  
métiers de l'enseignement  
en école bilingue »



kreizenn stummañ DIWAN  
centre de formation de DIWAN

## Sesion donaat - 3 miz

Eus an 18 a viz Meurzh d'an 21 a viz Even 2024

e KELENN e Kemper,

Kinnig a ra KELENN ur stummadur 3 miz donaat evit an dud deuet c'hoant ganto mont war micherioù ar c'helelenn divyezhek brezhoneg-galleg er c'hentañ pe en eil derez pe bezañ degemeret e Master MEEF-EBI KELENN.

Al live a glasker tizhout da nebeutañ da fin ar stummadur eo live B2 an DBY (DCL)\*, gantañ e c'haller mont war hini pe hini eus ar micherioù-se pe bezañ degemeret e Master danvez skolaerien Diwan (MEEF-EBI) e KELENN.

Eurvezhioù stummañ : 420 h.

Eus al lun d'ar gwener : 09:00 - 12:30 / 13:30 - 17:00.

Ar peadra goulennet digant ar stajidi : paper, kreion.

Ar peadra teknikel kinniget : ur sal glas, ul levraoueg (brezhoneg ha pedagogiezh), dafar urzhiataerezh, dafar kleweled.



## Danvez ar stummadur

### Modul deskiñ brezhoneg

Implij pleustrek eus ar yezh komzet ha skrivet.

Prientiñ an DBY (DCL)\*.

Priziañ : - dre gomz dibaouez ;  
- priziadennoù dre skrid e-kerzh ar stummadur ;  
- arnodenn dre skrid ha dre gomz e dibenn ar stummadur.

### Modul degas diazezoù ar c'helelenn danvezioù skol e brezhoneg

Studiañ degouezhioù da implijout ar brezhoneg da yezh kelenn eus ar skol-vamm d'al lise. 6 danvez skol a vo pleustret evit ar sesion-mañ : pletet e vo gant ar varregezh yezh, implij an dafar kelenn, an derminologiezh...

Priziañ : arnodenn dre skrid e dibenn ar sesion.



\***Diplôme de Compétences Linguistiques** (niveau A1 à C1). Examen à l'issue de la formation.

\*\* **Aides financières** selon le statut et le projet professionnel du stagiaire.

Veillez nous contacter pour plus de renseignements : 02 98 95 55 99

www.kelenn.bzh : Brezhoneg dindan 9 miz / Le breton en 9 mois.



## Teuliad studi — sesion donaat

Sevel un teuliad labour stag ouzh ar c'helelenn e brezhoneg.

Priziañ : danvez an teuliad ha difenn an teuliad dirak ur juri.



## Stajoù evezhiañ : 2 sizhunvezh

Graet e vo ar stajoù e skolioù Diwan pe divyezhek eus ar c'hentañ pe an eil derez. Stajoù evezhiañ e vint ma klasko ar stajiad kompren gwelloc'h implij ar brezhoneg er c'helelenn.

Pourchaset e vo lec'hioù staj deoc'h gant KELENN.



**Qualiopi**  
processus certifié  
RÉPUBLIQUE FRANÇAISE

La certification qualité a été délivrée au titre de la catégorie d'action suivante :  
ACTIONS DE FORMATION



Lec'hienn Kelenn - Brezhoneg dindan 9 miz.

Bremakeat d'an 18/12/2023